



AR GORNOG VRAS


Teul 2

Kêrbenn vreizhat ar pellgehentiñ e Frañs eo Lannuon. E 1962 e komañsas avañtur ekonomikel Bro-Dreger, a pa arruas ar C.N.E.T (Kreizenn Vroadel ar Pellgehentiñ) e Lannuon. Da heul an dilec'hiadur-mañ eh oa bet dedennet er c'hornad embregerezhioù bras ispisializet er pellgomz.

Lannuon a zoug randon get he zeknopol, hec'h aerborzh aferioù, hec'h I.U.T. (skol teknologiezh) hag he skol ijinourion ispisializet er pellgehentiñ ; dougiñ a ra randon ivez get he zachenn industriel leun-barr a uzinioù. Kalz muioc'h a ekipamantoù sevenadurel a gaver e kêr evit ne vehe an den engorto a gavout en un isprefeti : teir sal sinema, ur luc'hskeudennaoueg. Brav eo beviñ e kêr, tostik-tra d'un arvor meurdedus, aod ar mein roz.

Diàr *Le Monde*, 27 a Galan-Gouiañv 1996

Labour diàr ar gartenn



1/ Savit un daolenn (un alc'hwez) d'ar gartenn, ma vo tu da welet an elfennoù amañ edan :

- kêrbenn rannvro melestradurel
- porzh-pesketat
- porzh-brezel
- porzh industriel
- lec'h touristiñ
- ahel bras
- desav legumaj
- gwiniegi
- desav edouier a-vras
- desav bevined, moc'h, yer a-vras
- desav bevined, lies-trevad
- poblañs stank er-walc'h (> da 50 d/km²)

2/ Klokait ar gartenn hervez an daolenn

3/ Roit o anv d'ar c'hêrioù

4/ Roit un titl d'ar gartenn